

KIS-628 – Kensonenn dibenn pennanvioù hag adanvioù

(IK da GE – 12 05 99)

Hervez reolennoù an doare-skrivañ peurunvan e skriver an anvioù-gwan gant ur gensonenn divouezh en dibenn. Hogen nemedennoù a gaver e geriadurioù Roparz Hemon, evit anvioù-gwan zo heñvel ouzh pennrannoù-verb da skouer, evel *touz*, zo kar d'ar verb *touzañ*. Un toullad brav a goubladoù anvioù-gwan evel *touz/touzet* a gaver e brezhoneg, met ar re zo oc'h echuiñ gant *-et* n'eus ket bet roet bod dezho gwall alies e geriadurioù Roparz Hemon. Pa lakaer keñver-ha-keñver an daou anv-gwan-se en em gaver gant ur gensonenn disheñvel ma heulier ar reolenn (kensonenn divouezh en dibenn): *gourt* a-geñver gant *gourdet*, lakaomp. Souezhus eo un tammig, d'ar c'hentañ sell. Daoust ha ret eo lakaat skrivadur an daou c'her da glotañ ?

Kavout a ra deomp eo gwelloc'h derc'hel da zibaboù geriadurioù Roparz Hemon evit ar gerioù zo renablet enno (derc'hel d'ober gant ar stumm *gourt* ha n'eo ket gant *gourd*, lakaomp, ha pa vefe kavet ar stumm *gourdet* a-hend-all). Met petra ober evit ar gerioù n'int ket bet renablet gantañ, evel « *kruk/krug* » a gaver, a-geñver gant *krug* (ha *kruket* !) (s.o. HYZH. 56-57/26-28, HYZH 60-61/6-7, HYZH 76-77/11).

(GE da IK – 16 05 99)

Evit a sell ar c'hensonennoù dibenn adanv ha pennanv emaoamp a-du ganeoc'h : derc'hel skrivadoù Roparz HEMON evel m'emaint hep klask dedalvout ur reolenn hep soliadur bras. Evit an termennoù nevez e sav kudennoù, evel a verkez. Dezneuziet e hañval bezañ an amprestoù e-maez a reolennoù stabil ; skrivañ a reer : *katolig, republik, sovied, robot...*

Degouezh *kruk- /krug-* a ranker savlec'hiañ e-keñver an treug o vont eus an teodyezhoù d'ar yezh. Houmañ ne zisoc'h ket war-eeun eus renabl ar stummoù komzet lec'hel pe an damaoz roet dezho gant ar skrivagnerion rannyezh. He fal eo bezañ yezh unvan ur gevredigezh da zont. Mennoz Roparz HEMON o sevel GIBR oa katreizhañ ar yezh unvan dre ziskouez he *furmoù* evel disoc'h un treug istorel adalek *stummoù* tremenet. An aters dirak daou hanc'her evel *krugañ* ha *krukañ* eo ha lec'h zo d' ober

div *furm* anezho ? Un abeg kentañ a ve da gavout er gerdarzh ; hogen hervez notennoù Gwennole AR MENN ne hañval ket bezañ pep a c'herdarzh dezho. Un eil abeg a ve er steradur : ha disheñvel eo an durc'hadurioù ster douget gant pep hini eus an daou stumm ? Ne hañval ket. Trede abeg : hag ur pinvidikadur e ve d'ar yezh ober div furm eus an daou stumm ? Pe, en eneb, ha ne ve ket kentoc'h degas mesk ? Er yezhouriezh ez araezer a-wechoù dre drestummadur, eleze e tenner div furm eus daou stumm ungerdarzh ; hevelep araezad, abeg gant reoù 'zo, a gemerer evel *ultima ratio* ha war an diviz ma ve un diforc'h sonel fraezh etre an daou stumm. En degouezh-mañ, ha ne rafe ket diouer an diforc'h sonel fraezh etre *krug* ha *kruk* ? Evel just, un distagadur teodyezhel [kryk] ne ve e mod ebet un abeg evit kemm ar furm unvan *krug* e *kruk*. En embannadur kentañ ho keriadur hoc'h eus kredet menegiñ *tok* e-kichen *tog*, arabat e ve koulskoude addigeriñ ar yezh d'an ternud a zo bet ken diaes o c'hwennat.

(IK da GE – 15 06 99)

Chom a ra kudennoù avat, a gav dimp, evit a sell ar c'hensonennoù dibenn en anvioù-gwan na gaver ket skrivet e GIBR evel *kruk/krug* pe re all c'hoazh. Ober diouzh ar reolenn evit reizhskrivadur an anvioù-gwan, da lavaret eo lakaat ur gensonenn divouezh, evel ma kaver er ger *gourt* (e-kichen *gourdet*). Pe ober hervez ar “gerdarzh” (a c'houlennfe *gourd* evel *gourdet*) ? Heñvel a-walc'h eo an degouezh ouzh hini an anvioù-gwan zo savet diwar ar rakger *di-* ha *dis-* + anv-kadarn. E gerialurioù Roparz Hemon e kaver lod skrivet gant ur gensonenn dibenn divouezh o plegañ da reolenn skrivadur an anvioù-gwan. S.o. *dirod* ha *dirout* ha meur a skouer all.

E KIS-334 [La-08, p. 312, 318] e kaver ar ger *matematik*. E PRED 5, *Ur gudenn a vannouriezh* [1959], en doa displeget G. Pennaod peseurt kemm a lakae etre *matematik* ha *jedoniezh*. Ar ger *matematik* avat na adkaver ket e JEDO Yann-Baol An Noalleg. Daoust ha traoù all zo bet skrivet war an divoud abaoe *Ur gudenn a vannouriezh* ? Ha petra a soñjit bremañ diwar-benn ar c'hemm-se ?

(GE da IK – 16 06 99)

Ar c'hemm lakaet etre pennanv hag adanv gant yezhadurourion gent ar brezhoneg ned eo ket soliet evel m' en intentent. Diwar skouer ar yezhadurioù latin ha galleg klasel e raent anezhañ ur c'hemm furmel, eleze etre ar rummennoù stabil ma

renked ar gerioù ur wech da vat hervez o anien : *nomen, adiectivum, verbum*, h.a. ; gant se e fellas da unvanerion ar skrivadur pinvidikaat ar yezh dre verkañ spisoc'h ar c'hemm furmel dre ur c'hemm furm, o kevenebañ kensonennoù dibenn hevouezh / divouezh evel ma kevenebent pennanv / adanv. Diwelout a raent ur c'hemm all a zo ar c'hemm arc'hwelel, andon a freuz hag a reuz er rummennadur klasel : an un ger a c'hell bezañ verb, pennanv, adanv, adverb tro ha tro hervez darvezadur ar prezeg. Alese, e c'hoarvezas trubuilh en-dro da skrivadur ar brezhoneg. An holl a anzave n'eo ket peursoliet ar reolennoù diazezet war ar c'hemm furmel. An tabut, enaouet gant FALC'HUN en embanne evel kroaziadeg an arc'hwelelourion ouzh ar furmelourion, a voe e gwir un emgann etre tud a venne ober eus ar brezhoneg ur yezh unvan ha stabil ha tud na welent dazont ebet d'ar brezhoneg, un danvez d'o studi ha d'o remzad ne lavarent ket. E-touez ar re gentañ, Roparz HEMON a roe da arguzenn ez eo ar brezhoneg unvan an disoc'h eus un hir a zedroadur istorel, evel pep yezh, ha klask kemm e furmoù en anv ar skiant, ar poell pe forzh pe ideologiezh e ve e zistrujañ. Re all, evel Maodez GLANNDOUR a venne kanteizhañ kement ha ma oa kanteizhadus ar skrivadur unvan — sl. e bennad “Tabutoù nevez en-dro d'ar reizh-skrivadur” (*Studi hag Ober*, 16-17, 1972, pp. 66-68) ma klask arguzennoù e distagadur an teodyezhoù a anaveze. Kaout a ra din n'eus chomet en e sav hiziv nemet savboent Roparz HEMON. Ha poellek eo eus ho perzh degemer ar skrivadoù embannet gantañ e GIBR. Ne gav ket din avat e ranker klask bezañ poellekoc'h, heboelloc'h kentoc'h, egetañ dre glask koustet a gousto dreistpeurunvaniñ ar furmoù, da skouer o skrivañ *gourd* dre benn ma kaver *gourdet*. Dre vezañ *pwylllog* betek re ez eer buan da *gorffwyllog* !

Diwar vont, e venegan ar spletoù a c'haller tennañ eus ar c'hemm furmel er c'hensonennoù dibenn. Ur skouer hepken a roin, a denn da 'm labourioù personel. Unan eus krefen bras ar preder kempredel zo skoulmet en-dro da Al. *sein*. Etre an doareoù da vont dezhañ emañ an hent o vukañ da *sein* evel d'un argerzh hag an hent o vukañ dezhañ evel d'un hennad ; dre se e sav ar c'hemm *sein / Sein...* ha *bout / boud* (sl. etre arroudoù all, KIS-467, La-10, p. 241, v° Br. **BOUD/T**) ; er c'hemm etre *ar boud* hag *ar bout*, emañ ar c'hemm arc'hwelel, pell a freuzañ ar c'hemm furmel, oc'h emvataat anezhañ.

E 1959 hor boa klasket diforc'hiñ Br. *matematik, jedoniez, riñvelloniez*. N'eus bet dalc'het, ac'hoel en hon skridoù, nemet *jedoniez*. KIS-334, La-08, zo ur studi war dezneuziañ ar gresianeg ha n'eo ket un dibab termennoù. Kement-se n'eo ket lavarout ne vo ket debarzhet un arver da *matematik* pa vo ezhomm. E La-12 dres (KIS-584, pp. 129, 130, 137), en ur studienn war ARISTOTELES ha DESCARTES, pa ra HEIDEGGER gant an aa. *mathematisch* hag ar pa. *das Mathematische*, e kavan an

eeunañ

o zreiñ *matematek* hag *ar matematek* dre an abegoù-mañ : a) *ar matematik*
a zo anv anezhañ n'eo ket tre ar pezh a lakaomp dindan *jedoniezh* ;

b) da gendec'heriañ an adanv pennanvaet alamanek ez on aet dre an
hent a 'm boa heuliet da bennanvaat ar pennanor *bout*, eleze na gemmañ ar furm (en
doare ma skriver ivez *ar priñvel*, *al leiel*, *ar muiel*, *ar gwerc'hel*, h.a. er Jedoniezh —
hep ma savfe kudenn a skrivadur en degouezh, gwir eo).